

# — Pegen kaer

H. DE LA VILLEMARQUÉ.

Ton : Bale Arzur.

*♩ Diskan*

Pe-gen kaer ez eo Mamm Je - zuz, Pe-gen dous  
 ha tru-ga - re - zus. Pe-gen mat ha ma-de - le - zus!  
 1. La - var d'in - me, den an Ar - vor, Ha ken kaer  
 eo da vag war vor, Gant he goue - liou gwennkann di - gor?

## PEGEN KAER EO MAMM JEZUZ

**Pegen kaer ez eo Mamm Jezuz,  
 Pegen dous ha trugarezuz,  
 Pegen mad ha madelezuz !**

- |  |   |
|--|---|
| <p>1. Lavar din-me, den an Arvor,<br/>         Ha ken kaer eo da vag war vor<br/>         Gand he goueliou gwenn-kann digor ?</p> <p>2. Lavar din-me, den an Argoad,<br/>         Ha ken kaer deliou glas ar hoad,<br/>         Pa zeu eur bann-heol d'o skleraad ?</p> <p>3. Lavar din-me, den an Are,<br/>         Ha ken kaer eo lein ar mene,<br/>         Gwenn-kann gand an erh d'ar beure ?</p> | <p>4. Lavar din-me, paotr an denved,<br/>         Hag-hen 'z eus steredenn ebed<br/>         Ken kaer en noz steredennet ?</p> <p>5. Livirit din, tud ar maeziou<br/>         Ha ken kaer eo ar glazennou<br/>         O lintra gand ar glizennou ?</p> <p>6. Livirit din, bugaligou,<br/>         Er prajou o kutuilh bleuniou,<br/>         Ha bleun ken kaer 'zo er prajou ?</p> <p>7. Nag en Arvor, nag en Argoad,<br/>         Er menez, en oabl nag er prad,<br/>         Netra ken kaer, netra ken mad !</p> |
|--|---|

## QU'ELLE EST BELLE LA MERE DE JÉSUS!

R/ Qu'elle est belle, la Mère de Jésus ! Qu'elle est douce et miséricordieuse,  
 Qu'elle est bonne et compatissante!

1. Dis-moi, homme de l'Arvor, est-elle aussi belle, ta barque sur la mer,  
 Avec ses voiles blanches ouvertes ?
2. Dis-moi, homme de l'Argoad, est-elle aussi belle, la verdure des bois,  
 Éclairée d'un rayon de soleil ?
3. Dis-moi, homme de l'Aré, est-elle aussi belle la crête des monts  
 Toute blanche de la neige matinale ?
4. Dis-moi, petit pâtre, y aurait-il une étoile  
 Aussi belle en la nuit étoilée ?
5. Dites-moi, hommes des campagnes, sont-elles aussi belles, les pelouses  
 Toutes scintillantes de rosée ?

6. Dites-moi, petits enfants, qui cueillez les fleurs des prés,  
 Y trouvez-vous une aussi belle fleur ?

7. Ni en Arvor, ni en Argoad, ni sur la montagne, ni au firmament, ni dans le pré,  
 Rien n'est aussi beau, rien n'est aussi bon !